

CHANSON CLOAREC PEMPOUL.

Var eun ton superb

Entre geric Pempoul ha stang an Abaty
Eus eur c'hoarec yaouanc o pour-u e s'udi.
Hac en deus composet eur zou d'e vestres coant,
Evit e bassetans ha dector tud yaouanc.

Divar mene Crec'h-Noa, pa veza em repos,
Me a hell hep fizia contempli eiz paros :
Kerity hac Yvias, Perros ha Lanviniec,
Plouezec ha Plourivo, Ploenez, ha Plorennec.

Ouspen e contemplan er pevar elemant :
Ar môr gant e lestri e cos-ez al levant,
An douar er c'huz eol fructifiet gant poan,
An aer a zious'h va feno caë ou'h eguet an tan.

Ouspen e remerqan costez tri dioces :
Sant-Briec ha Treguer, ha Dol hep tromp'erez,
Extrémite Bro-Sauz ha Sonantelez Franç.
Hanvet scol ar vertuz, cabinet ar sciang.

Noblançon a blezang decoret a goajon,
Questel, ha tiez goard carguet deus a armou,
Eucennou fertil, antouret gant Neptun,
Hac havrou frequentet var o zro zo commun.

Ma ve liër va laga l, en deffe plijadar
D'ar c'houlz n'apparis mui mad ena an natur,
O velet ac hane mouvamant an envou,
Sclerijen ar stered h'g ar planedennou.

Goechal, pa voan disqib d'Aristot ha Platon,
N'en devoa va speret hep satisfaction
Nemet o veduta var levriou ar sciang,
Ouz o c'housideri n'em boa qen jassetans.

Amzer a vag peb tra, n'en deus mui a charmon.
Gouarner ar ga o'v am dalc'h en e lasso :
E ar pe'h zo en Pempoul zo re grenn a ressort :
Am dalc'h da languissa en despet d'am oll effort.

Reculit oll adren, rarenteou Crec'h-Noa,
N'oc'h eus mui a bonvoar da rei d'am c'halon joa ;
Er geric a l'empoul ena va plijadar,
Eno ma va Mestrez, eur gu-net dreist natur.

Calliop, Polymni, Terpsichor, Erato,
Unani, Melpomen, Euterpe, ha Cho,
Ha c'houi ive Thali, c'hoar leun eus ar furnez,
C'houi a voar an doare, me invoq hoc'h adres.

Exaucit ma feden, Jenitor, Jupiter,
Quit taït an dezert hac antret en qer ;
C'houi a voar an doare, quittait prompt ho plac,
It da gaout va mestres, grit din antren en grac.

Secudit Cupidon da essat e gounit.
Ouz e rebellion implic'h da oll gredit :

Gra dezi va c'haret qement a me c'haran,
Pe laq hi da zevi guemen er memes tan.

Poursuiv nei erfin, lavar dei, Immortel,
E deus e Kerity eur servicher fidel ;
Represen i dezi e zon prest da vervel,
Mat quendalc'h da veza em andret qen cruel.

Mercur, enbassader, tad ar sperejou mad
Messager eloq'ant, cas dezi va m'neat ;
Digor da zious esqel ha nij proump dre an aer,
Hep tenna da lalan, disq n'ebars en qer.

Abord-hi em reqet, gra dezi compliment,
Sezis dre rezonnou a dre gomzon charmant,
Ha tenn eur cedulen qent retorn var da c'his,
Sint em av'ntach gant an dorn am languois.

Mæs mar choofe bepret en e opinion,
Digas din Lachesis, Atropos ha Cloton ;
Digas memes ar maro armet a ped gallout :
Dre ar maro driduez da rei fin d'am hirvouq.

Erfin bet diganti eul lincet griet mad,
Eun archet hac eur b z evit fin va laqt,
Ha ma car va buez, e devo blijadur
Da viana d'am maro o rei d'in sepultur

Bess e deus pouvoar da gommand d'ar Maro,
Ha me demeus ma bez a zavo d'am giavo ;
Me zavo ac hane, res-uscitet gant gloar,
Evit e admira evel eud eil Lazar.

Biscoas an Ameriq daonest de oll bompad
N'e deus guëlet guenet qer caër, qen dernad,
Na bi-coas an Asi, gant oll fertiute,
N'e deveus produet nevelep rarente.

Disqen en qer Pempoul, qers dre ru an Illis,
Ha tech flechissa an objet am languois,
Ha na espern neutra er seurt occasion,
Evit gonit e speret a rei joa d'am c'halon.

Impalaër puissant, monarq victorius,
Mab enna an envou, fidehte Venus,
Laq en e c'halon ar birlem am blessas,
Ma teuz en ber amzer evit ma rentan ya'h.

Me stago ouz va brec'h d'orn divin Appelles,
Al hou caër em b'antiq hac em penn ann adrese
Da denna e fortret da gass d'au Occident,
Da gass ebars er Sud, en Nord et Levant.

Eur mennat ran c'hoas qent disqen er Menez ;
Me a garre plijout da galon ma mestres ;
Romanez ar Muset, bo pet a tention
Qent ma zin da repos canomp dezi ar zon.

SON AR BUTUN

Var ton : *Michel Noblet pe Chanson ar gommerezet.*

En o' tones, Bretonet,
Mê gred n'en deus nicun
Ac e fache o clevet
Parlant eus ar butun.
Eu Breiz-Iz' l' ar voarset
A zo oll funerrien ;
Ar graze hac ar merc'het
A zalc'h abatieren,

Eun den hanvet HERMANDES
Eus ar Spagn gimdic,
O vea ed eun deves
Betec an Ameriq.
Eu ezeuz Tabag,
Bremen zo tri c'hant vla,
A zizoloas eno
Plant butun da guenta.

Digas a ra d'he vam-bro
(Orzennou gred ractal ;
Eun nebeut eus anezo
E ro d'har Portugal
Eus a belec'h *Yan Nicot*,
Cannat ar roue Frañç
A zistroas gant carot,
Ha roll en abondanc

Itronezet ar Pales,
Couls hac ar pennou bras
Demens hou rouanteles
Souden a estonas,
Pa vejont butun laket,
Gent eun hast ar vrassa,
Da ober cranch a moget
Ha da lakat strefia.

Mæs kerkent an dud guezic
A commença c'hoari,
Caout a rejont mil abec
Er butun eorn fri.
Meuducin ar Rouanez,
Vit Pijout de itron
A lavaras eun deves :
Ar butun zo poeson.

Cals eus a dud ignorant
Var ar maes hac en kaer
A grede voa eur presant
Roet gant Lucifer
Ar Pab, a ben seiz sizun,
Couls hac ar vel-yun
A to-kas var ar butun
An excommunugen.

An doctoret i n'portun
E clas diinnai
Custumou fal ar butun,
O lakas da greski,
R e an oll labourrien
A deus d'o goapet
En eur vrassaat ar ehiken
Couls hac ar c'horniedat,

Goude cals a jolori
Ha meur a obaden
E commença c'hoant fumi
Antreal eu o feu.

Neuze oll e commanchont
Der-hel melin pe foru :
En o godel e touchont
He eur voest pe eur c'horn.

Ebars er Frang. marteze
E zeus meur a gillen
Pere c'hoas a refasfe
Komeret eur brisen
Mæs h ken eur guir bre'on.
Na greg coant, na plac'h flour
N' vo, a greiz e gilon,
D'har butun adverso ir.

Butun zo ken necesser
Evel ma ze ar boued,
Meur a zen eus ar c'hartier
A jomfe zur eb preb
Q'ontoc'h evit eb butun,
Ar brassa funerrien
N'e ket an dud a fortun,
Mæs sious ! ar beortien,

Ar mevir a verz dil'at
Evit c'hoat da eva ;
Ar paour evit butunat
Zo kasi memeus tra
Galet a r'er avichou
Eun tou cos paganat
O aet betec e billon
Evit eur c'horniedat.

Remerki a r'er breman
A falla mic'hiec,
Eur c'horn brssoc'h evitan
O vianskel en e veg ;
Er scol n'eus allet diski
N' met e *VE ha BA.*
Mæs er skiant da fumi
E zè ur savanta.

Neller ket goueoude
Disrjout ar butun ;
Eur c'hornedadic bemde
Deus ar mitou var yan,
A scanva cals ar bilou,
Hic a gass kuit ractal
A loan dent, goel hu noriou,
Kercouls hac an er fat.

Ar butun zo eur mignon
D'an den zo e unan ;
Pried eur vreg di'ezon
A gousol en e boan ;
Pa vel manch ar scubelen
Prest da vou var e choug
E lak tan var e bihen
Hac e ya en e roud.

Potret yaouanq defical,
En oad d'ober al lès
A blij da-ze butunat
En kichen o mestres ;
An draze zo direspet,
Eun amouros poti,
Dirac e muia caret
Ne glefs quiet fumi.

Amzer zo bet yan zoudard
A vije diou zizun
O testun pévar liard
Evit prenan bu'un,
Mæs an oll a vo contant
Bréan da zervicha,
Pa ro ar gouarnament
Butun evit neira

Sellit eus ar martolod,
O font d'e vatimant
Gint provi-ion carod,
Hic cigarennou coant.
Neus douc c'h evitan
Hopret e ve laonen ;
Mæs diouallit diouan
Pa lako eur chik'n.

Butun p'ult so d'ar merc'het
Excellent hac util,
M' d e deus ar c'hoant kousket ;
Ha da zigas barbil.
Oier a ra tud savant,
Rac ouспен tri c'hant den
O deus caret o skiant
En eun dabatieren.

Pa deu d'ar pla 'h coz-viret
C'hoant da vou en fortun,
E touan dirac ar hotret
Eur voest leun a vutun ;
Neuze ar c'henta mi
A deuyo da gaemer
Eur bizennec diganti
A vo e zervicher.

Deus e ar c'his da voarset
Da gaout tabatieren,
Mæs ive cals a vr'c'het
A blij dè ar biben.
Eur voreden alouret
A stribel eus ar fri
A zo ken caër da velet
Ac eur c'horn o fumi.

Ar butun zo eur remed
Da lakat distè li ;
Pur-mia ve implijet
Eus ar bo n'zili
Ann oll a brofit outan,
Ar pez so g'elloc'h c'hoas ;
Erz c'ent mil den devarnan
A c'hoant o bara.

Mont a rin, va mignonet,
Bremen da echui,
Mar oc'h eus c'hoant da glevet
Piou e ve an ini
Er deus gret ar ganouen ?
N'e quiet divar ar maes ;
E hano zo PÈR DERRIEN
Eus a gær Montroules.

FIN.

(PROPRIÉTÉ DE L'ÉDITEUR.)

P. DERRIEN.